

# G W E R Z

ANN

## ITRON VARIA GARMEZ

### ENN PARROUZ LEZKOËT



1. Zalud d'ac'h, iliz santel, enn enor d'ar Werc'hez,  
A zav evel eur boket e kreiz parkou Karmez :  
Ouz ho kwelet gant fianz e pedann Mamm Doue,  
O sonjal er burzudou a ra enn-hoc'h bemde.
2. Aman gwechall eur potr-saout o viret he zenvet  
A glevaz enn eur bod spern eur vouez ho lavaret :  
*« Et da ziskuil d'ar person e fell d'inn el lec'h-man  
Kavet dindan ma hano eunn tî da chomm enn-han. »*
3. Ar bugel erru er ger a lavar d'ar vatez  
Ar c'homjou enn deuz klevet epad ma oe da vez :  
Ho daou raktal e redont, gand ho chapeledou,  
Ar bugel a glev arre ann hevelep komjou.
4. Ar plac'h kaer he deuz tostât, na intent ger ebet  
Ken n'he deuz kroget e dorn ar bugel daoulinet :  
Neuze vit ann daeret gwech ar vouez a lavar c'hoaz :  
*« Eunn tî fell dinn da gavet aman el lannek-vraz. »*

5. Da Vourc'h Lezkoët a zeün-kaër, joe vraz enn ho  
[c'halon,  
E teuont da zisrevel ar burzud d'ar person  
Hanvet ann otrou Huard, karet gant he zenvet ;  
Biskoaz enn amzeriou fall n'en doa ho dilezet.
6. « *Otrou person, el lannek hon daou hon euz klevet  
O sevel deuz eur bod spern eur vouez e deuz laret  
Ober deï eunn ti eno, hag ec'h omp deut raktal :  
Hon c'halon enn-omp aboe na ra nemert tridal.* »
7. Ar belek fur da gentan na gred ket anezhe ;  
Eurwech koulskoude d'ar park ec'h assant mont ive:  
Pa oant ho zri daoulinet e klewjont meulodi,  
Evel elez ho kanan uz d'ho fenn gant dudi.
8. E kreiz al lannek neuze, tud koz, c'hui oc'h euz zonz,  
Gand banel ha gand raden e oe zavet eul lonj,  
Laket ebars ar Werc'hez, netra enn dro dezhi  
Evel pe c'har:az he mab war blouz eur marchosi.
9. Netra enn dro d'ar Werc'hez enn he lonchik raden  
Met bezier ha brandellou lezet enn he c'hichen :  
Ar-re ho deuz ho gwelet n'int ket oll c'hoaz maro ;  
Mari, skuillet ho pennoz war-n-omp ha war-n-ezho !
10. Enn amzer-ze christenien, leiz ar venojennou  
A Gerne hag ha Wenet a deue a vandennou  
Da c'houlen iec'het d'ar c'horf, trugare d'ann ine :  
Ann oll ho devoa grasou gant ar *Zantez neve*.
11. Eur plac'h iaouank pinvik braz a eskopti Gwenet,  
Hag a oa pell-zo gant-hi bet kollet ar c'herzet,  
Enem gavas pareet epad ann oferen  
Ha raktal enem lakaz hec'h-unan da bourmen.

12. Kalz a vurzudou-all c'hoaz oe gwelet e Karmez,  
Tud ar vro enn kement-man zante dorn ar Werc'hez,  
Prof a goueze a bep-tu, hag enn amzer ar foen  
Pelerinet a vije bemde leiz ann dachen.
13. Ar-re goz a zidoste da welet rog mervel  
Pegen braz eo madelez hon Rouanez zantel :  
Mammou klemmuz a zeue evid ho bugale ;  
Ar vugale n'ho c'havel a blij da Vamm Doue.
14. Neuze sonjaz tud ar vro zével e park Karmez  
Eur chapel frank ha kempenn enor d'ar Werc'hez.  
Na vankaz na mein na koad : ar Breton a zo paour,  
Mez evid he ilijou e kav arc'hant hag aour.
15. Ann deiz ma oe benniget tî ar *Zantez neve*  
Hed ann henchou, a bep korn ann dud a zirede :  
Kaër a oa gwelet eno re Gerne, re Wenet  
Enn dro d'oter ho Mamm vad evel breuder stouet.
16. Ouz-penn hanter kant vloaz-zo Mari deuz komzet:  
Enn hon c'henver he c'halon a zo tener bepret,  
He gallond a zo ken braz evel ann deiz kentan  
Ann Itron Varia Garmez eo hon Mamm ar wellan.
17. N'euz ket pell gand ann drouk-sant eur bugel oe  
[skoet :  
Gwestlet a oe d'hon Itron gand he dud glac'haret ;  
Ar bugel a zo pare, deut eo bet he vamm vad  
Euz a Skaër bete Karmez vit he zrugarekad.
18. Diskoomp, evel gwechall fe grenv ha karante,  
Hon feden a vo klevet gant ar *Zantez neve* :  
Evid-omp e deuz komzet, hon gervel a ra c'hoaz :  
Hep beza primm chilaouet piv he fedaz biskoaz ?

19. Ann eiz a viz gwengolo e ve gret ar pardon :  
War roudou hon tadou koz kerzomp a wir galon,  
Digasomp hon bugale vit ma tiskent ive  
Heuil kizou mad ho c'herent ha karet Mamm Doue.
20. O Mari hon fatronez miret d'ar Vretonet  
Enn draounien-man a zaëlou ar peoc'h hag ar  
[iec'het :  
Dalc'het ar fe n'ho c'halon : na petra dalfe d'he  
Bezan pinvik, bevan pell, ma n'ho deuz ket a fe !
21. War hon bro, war ann Iliz, skuillet madelezou,  
Enn-hoc'h e lakomp fianz e kreiz hon zrubulliou ;  
Pa-z-oc'h eur vamm ken tener, bikenn, Gwerc'hez  
[Vari.  
Ann ifern, mar ho karomp, na hello hon zrec'hi.
22. Pa vo hon heur diveza, ho pet zonzj, ô Gwerc'hez,  
Euz ar re a vo deuet d'ho pedi e Karmez :  
Zerret c'houi hon daoulagat ha douget hon ine  
D'ho meuli da virvikenn e Baradoz Doue !

*Evel-se bezet gret.*